

KANTIK
en enor d'an
DRINDET ZANTEL

Diskan

Adoromp oli gant an Eled
An tri ferson eus an Drindet ;
Enor ha gloar d'he da viken
Aberz an oll grouadurien.

1

O myster bras trec'h d'hor rezon!
Eun Doue zo e tri ferson ;
An Tad, ar Mab, ar Spered-glan,
Tri ferson ha Doue unan.

2

An Tad, oc'h anaout é furnez,
D'e Vab karel ro ar Vuez,
Hag ar Spered a zeu neuze
Eus o farfeta Karante.

3

An Tad, dre e gomz galloudus
A grouas an traou burzudus
A velomp pe na velomp ket
Street gantan dre oll ar bed.

4

Ar Mab, dre druez ouz mab-den,
Oc'h e velet 'barz an anken,
En deus n'em c'hret den é-unan
Ha distollet d'han tle ha poan.

Ar Spered-glan a skuill bemde
 Buez ar c'hras en hon ene
 Hen a ro d'ei ha nerz ha joa
 Ekreiz brezelion ar bed-ma.

6

Parfet an eil hag egile,
 O zri e mant memes Doue :
 An Doue se e zo hon oll vad
 A dleomp karout ha c'hoantat.

7

An Doue se zo, mestr souveren.
 D'an noz, d'an deiz a ro lezen ;
 An heol, ar glao a zent outan ;
 Piou eta na zujo ket d'an ?

8

Hen lak an oabl glaz pe tenval,
 Hen ro amzer vad pe fal ;
 An avel hag ar gurunou
 A drouz pe dav dre é urzou.

9

An nênv, an douar hag ar mor
 A gan, d'han benoz hag enor,
 An en ar pesk hag ar boked
 E veul kerkoulz hag ar stered.

10

Kaër ve an heol var ar c'hreiste
 Pa ren en nênv'vel eur Roue ;
 N'eo' met eur c'hoariel displead
 Dirak Doue an oll c'hened.

(Kavet en Preved-Langon)